



K
R
O
A

B
R
E
I
Z

GWERE 1948 ③ PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Bevomp evit Doue (Y.-P. Falch'un)	Pajenn	1
An Divroet (Evnig-Penn-ar-C'hoad)	—	2
Gouelioù ar Miz (An Tad)	—	3
Psalmou ar Binijenn (F. Guivarc'h)	—	4
Eur Skouer (Arzel Gervorvan)	—	5
Glaoda ar Braz (Falc'h-ar-Prad)	—	6
Kantikou ha Kantikerien Breiz-Izel (L. Lok)	—	8
Koef pe dok, Tok pe koef	—	10
Ar Brezel e Breiz-Izel (Mari Seite)	—	12
Lennit		
C'hoarzomp C'hoaz	—	15
Keleier		
Bourd ha Fars	—	16

Korn ar merour : L. Bleunven.

Kousk va Lellig : L. Lok.

War golo an niverenn-man eus Kroaz Breiz e weler ar porz Kamed, fennet gant Gilles Boinet, eus Hédé (Ilh-ha-Gwilen).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25 lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200 lur	
Koumanant a zikour	300 lur	
Koumanant a enor	500 lur	

Kas an arc'hant da : Mr l'Abbé Laurent BLEUNVEN
Recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mor plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

Micherourien, tiez a genwerz!

grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz!

BEVOMP evit DOUE

Bugale omp da Zoue, ni kristenien.
Hor pedenn eo : *Hon Tad a zo en neñv...*

C'hoant ar bugel eo beza gant e dad, tremen an amzer en e gichen, komz gantañ, diskouez dezafañ e garantez en eur vev evitañ.

Gwelit en devezioù-mañ a viz gouere, ar vugale o vont d'ar gêr eus ar skolioù. Na pebeuz levezet!

Chomet int bet, epad mizioù marteze, pell diouz o zud, etre peder moger ar skol. Alies o deus soñjet en devez a zigorfe dezo an nor da vont d'ar gêr. Epad m'oant azezet ouz an daol-studi, aketus, da welet, war o labour, pet gwech n'eo ket bet nijet o spered etrezek o zud hag an ti; pet gwech n'eo ket tremenet dirak o daoulagad dremm karet an tad hag ar vamm!

Digor oa dirazo eul levr galleg pe latin; marteze e seblantent poania da niveri war o bizied, pe da zeski petra en doa graet Loeiz XVI, ha pet brezel en doa gounezet Napoleon... Ha padal, edont oc'h huñvreal pegen kaer e vefe adarre beza dizale, pell diouz al levrioù hag ar c'hentelioù, e kichen an tad hag ar vamm...

Lezenn ar garantez eo!

A garantez a zach kalon an den etrezek ar peñ a gar.

Ha da heul ar galon, ez a ar vuhez a-bez : ar soñjou, an huñvreoù, an oberou.

Hervez an ditour : « Lavar din pere eo da zofioù, ha me lavaro dit e pelec'h emañ da garantez ».

Ni kristenien, hon eus eun tad hag eur vamm war an douar-mañ, hag eun dever plijus eo evidomp soñjal enno alies, ha diskouez dezo hor c'harantez.

Met en neñv ive, hon eus eun tad hag eur vamm : Doue a zo fellet gantañ hor c'hemer da vugale, lia roet en deus deomp eur vamm, ar Werc'hez Vari!

Petra omp evito?

Bugale garantezus, stag mat ouz o familh?

Pe vugale diannaoudek, ankou-nac'halls?

Da biou eo hor soñj kenta pa zihunomp, hag hor soñj diweza araok koeza e tenvalijenn ar c'houk?

Da Zoue pe da unan eus e grouadurien?

Da biou e lavaromp ar ger kenta a dremen war hor muzelloù, hag an hini diweza?

D'hon Tad eus an neñv, pe da unan eus e grouadurien?

Epad an deiz, piou eo a leun hor spered? Gant piou ha petra omp chalet? Evit piou eo graet hol labour? Da biou e fell deomp ober plijadur? *Piou eo a zervijomp?*

Doue, ni hon-unan pe eun all bennak?

Peseurt frouez a c'hortozomp eus hor buhez?

Nerz, madou, yec'hed, enorioù, plijadurioù, karantez a-berz an dud?

Pe karantez evit Doue, hag a-berz Doue?

Eur frouez eus ar bed-mañ hag evit buhez an douar-hepken. ha ne vezo ano ebet ken anezafañ a-benn hanterkant vloaz amañ?

Pe ar frouez peurbadus, an hini a dalvezo kement a-benn kant ha mil bloaz?

Eus ar seurt frouez-mañ, n'eus nemet unan : **KARANTEZ DOUE!**


Greomp eta eur zell aketus war hor buhez, e dounder hor spered. Ma c'hellomp, goude an enklask, rei deomp an testini emañ troet hor buhez etrezek hon Tad eus an neñv, mat ! Bezomp laouenn, ha meulomp Doue en deus dalc'het ac'hanomp beo-buhezek en e familh !

Ma welomp avat n'emaomp ket war an hent-se, klaskomp buan dont warnañ, kement ha m'hon eus amzer c'hoaz. Ar beajour a vez faziet diwar e hent en devez mall da zont war e giz evit kemer an hent mat : perak koll an amzer o vont pelloc'h gant ar fazi, pa n'eo nemet kreski ar boan hag ar skuizder da zont en dro ?

Mar deo ret, goulennomp an hent : unan a gavimp atao da ziskouez deomp e pelec'h emañ, hag hennez eo Jezuz-Krist : « Me eo an hent », emezañ.

Dalc'homp soñj !

Y.-F. AR FALC'HUN.



AN DIVROET

Da Laouenanig Breiz.

Taol-distaolet, er gorventenn
Evel eur paourkaez drask ;
Faez kenañ e-touez estrenien,
Me a zo deut da glask
E bro va yaouankiz,
Peoc'h, levenez, frankiz.

Heol gouere a graz ar bizin,
War an tevenn didud ;
Hed an aod, koumou berr, mibin,
A ruilh eon gwenn, munut ;
An traez a zo tomm-gor,
Moredet eo ar mor.

Kreisteiz ! E disheol eur c'hoad pin,
Fresk eo-ha c'houek an aer...
D'an douar e stouan va glin,
Pa vrall, heson ha sklaer,
Kleier santel va Bro,
Nac'het ouzin pell 'zo.

Sioul va c'halon, acz va spered,
Gant karantez ha feiz,
Seiz Sant va Bro am eus pedet
Da evesaat ouz Breiz ;
Ouz he zud, he madou,
Ouz yez kaer hon Tadou.

Delvenn gwerc'hez ar voraerien
A sked war ar run rouz...
Er park ledan, ar vederien
Hanter guzet er plouz,
Paotred merc'hed, diskuit,
A zamm bec'hioù gwliz.

A zarnij gweñv ha skañv...
Breiziz vihan, e-kreiz ar prad,
A gutuilh bleunioù sañv.
En-dro d'an inizi,
E leviata bigi.

Pegen kaer ar c'huz-heol er mor !
Diskennomp er serr-noz...
Betek ar porzioù koz...
Me a gavo digor pep dor
Ha mignon e pep ti...
Ne harzo ket eur c'hi.

EVNIG-PENN-AR-C'HOAD.

Goueliou ar Miz

1 a viz gouere, yaou : GWAD PRISIUS HCR ZALVER. — « Eur zoudard a doulas kostez Jezuz, hag e teuas gwad anezan »... Gant e wad, ha n'eo ket gant aour na gant arc'hant, en deus Hor Zalver hon dasprenet... Gant e wad ivez eo e kendalc'h e pep oferenn hag e pep absolvenn, da c'houlenn grasou evidomp ha da netaat hon eneoù diouz ar pec'hed... Komprenomp talvoudegez hep muzul ar Gwad prisius-se ha greomp atao eun implij mat anezan.

2 gwener : GOUEL AR WERC'HEZ O VONT DA DI ELIZABED. — « Magnificat... Va ene a gan meuleudi da Zoue... Benedicta tu in mulieribus : benniget oc'h dreist an holl gwragez ». — Ar Werc'hez Vari, e pep mare eus he buhez santel, n'eus bet nemet eur zont en he spered : ober volonteze Doue ha renta gloar dezan. Abalamour da-ze eo bet benniget dreist an holl grouadurien all, hag he deus meritet beza dibabet evel mamm da Zalver ar bed. Bennoz Doue a gouez atao, e doare pe zoare, abred pe ziwezad, war an neb a ra e volonteze santel. Dalc'homp eta start d'e c'hourc'hemennoù, ha pa vezomp o kana ar Magnificat d'ar gousperou pe o lavaret ar chapeled, pedomp ar Werc'hez Vari da rei skoazell deomp.

Hirio eman gwener kenta ar miz... Greomp eur gomunion vat en enor d'ar Galon-Zakr, ha kinnigomp dezi hor poanioù hag hol labourou evit digoll an dismegans a vez taolet warni bemdez gant fallagriez ar bec'herien.

4 SEIZVET SUL GOUDE AR PANTE-KOST. — « Kement gwezenn vat a zo a zoug frouez mat »... Petra c'mp ? Gwez fall o tougenñ frouez fall, da lavaret eo kristenien fall hag a zizent ouz lezennou Doue... pe gwez mat o tougenñ frouez mat, da lavaret eo kristenien vat hag a vev diouz an Aviel ? — Taolomp evez mat ouz hor sonjou, hor c'hoantegeziou, hor c'homzou, hon oberou. Petra int ? Frouez mat pe frouez fall ? Din da veza meulet gant ar C'hris... pe din da veza kastizet ?


11 EIZVET SUL GOUDE AR PANTE-KOST. — « Rent kont eus da oberou »... Setu aze ar c'homzou a lavaras ar mestr d'e verour e parabolenñ an Aviel... Setu aze ivez ar c'homzou a lavaro deomp an Aotrou Doue da fin hor buhez, pa deuiio ar maro d'hor c'herc'hat. — Sonjomp alles en deiz bras, deiz ar varn, ha ne bec'himp ket.

18 NAVET SUL GOUDE AR PANTE-KOST. — « Jezuz a ouc'has war Jerusaleim ». — Allas nag a dud, nag a vroioù a ro lec'h ivez da Jezuz da ouela warno, abalamour d'o fallagriez ! n dra-ze eo a c'hoarvez dreist-holl gant eun ene, pa vez er stad a bec'hed. — O ! diwallomp da lakaat Jezuz da ouela warnomp ! Sentomp atao outan. Hon dever hag hor mad eo !

25 DEKVET SUL GOUDE AR PANTE-KOST. — « O va Doue, ho pet truez ouzin ». Evelse e ped ar publikan e traoñ an Templ, ha raktal en deus ar pardon eus e bec'hajoù. Doue a zo trugarezuz meurbet ouz an holl bec'herien, pa wel o deus keuz da veza dizentet outan, hag ar volonteze start da jench en amzer da-zont. Sonjomp ervat e kement-se, ha ma c'hoarvez ganeomp koueza en eur pec'hed grevus bennak. — Doue ra viro ! — deomp da goves kerkent gant ar zantimanchoù mat a zo dleet.

26 lun : GOUEL SANTEZ ANNA. — « Ar vaouez he deus doujans evit Doue, eme ar Skritur Zakr, hounnez a vo meulet »... Ma 'z eus eur vaouez hag he deus bet doujans evit Doue, eo a dra-zur, Santez Anna, mamm ar Werc'hez Vari, ha mamm-goz Hor Zalver. Ra vo meulet eta... ha ra vo meulet dreist-holl er vro a zo gouestlet dezi, Breiz ! Daoust ha n'eo ket an dra-ze a c'houlenn an Aotrou Doue e-unan ? « N'ho pet aon ebet, eme Santez Anna da Nikolazig, pen'en em ziskouezas dezan, me eo Anna, mamm Mari : c'hoant am eus e vefe savet a-nevez, va chapel, aman e Keranna. Doue a fell dezan e vefen enoret adarre el lec'h-man ». Meuleudi hag enor eta da bro ha sevel anezi ken uhel ha biskoaz !

An Tad



PSALMOU ar BINIJENN

EILVET PSALM A BINIJENN

gant an Ao Guivare'h

143 vet PSALM

Domine exaudi... auribus.

Na jomit ket bouzar Doue, ouz va fedenn.
Fidel oc'h ha leal, roit d'in va goulenn.
Na stagit ket d'am barn, rak n'eus war an douar,
Den ebet hag a ve, dirazoc'h, hep kailbar.
Bepred, ouz va gwaska, eun enebour touet.
A vres, dindan e dreid, va izili flastret.
Hag a zalc'h ac'hanoun, 'kreiz an denvaltjenn,
Evel an dud varo, n'o deus tam sklerijenn.
Mont a ra kuit va nerz, semplant a ran bemdoz.
Ha va c'halon a sko, goustadik ha rouez.
Dont a ra din da zonj, eus an amzer gwechall,
Eus ho madoberou, n'hellan ket dizonjal :
Ha kement hoc'h eus graet, ne da ket eus va fenn.
Hastit afo, Doue, seveni va fedenn.
Va daouarn a zalc'han war-zu ennoe'h savet ;
Hag an douar, en hanv, gant an heol dizec'het,
N'en deus ket brasoc'h mall da gaout eur strinkad-dour
Eget m'am eus da gaout diganeoc'h ho sikour.

Doue, dinerzet oun, fallaat a ran timat
Na dit ket diwarnoun da dre ho taoulagad.
Rak anez, oun echu : mont a ran da veza.
Henvel poch ouz an dud er bezion o vrelna.
Lavarit din buan eur gomz a drugarez.
Ennoe'h am eus fizians, hag en ho madelez :
Diskouezit din an hent a dlean mont gantan ;
Warzu ennoe'h, Aotrou, va c'halon a zavan.
Dilivrit ac'hanoun diouz va enebourten :
N'am eus klasket difennour nemedoc'h c'houi hepken.
Deskit din an doare d'ober deoc'h plijadur,
Rak c'houi eo va Doue, ha me ho krouadur.
Aotrou madelezes, ra zeuio ho spered
D'am blenia dre an hent eun ha plean bepred.
Evel gloar hoc'h ano, rentit din ar vuhez
Hag en ho lealded, va zennit a enkrez.
Distrujit, me ho ped, va holl enebourien.
Lakit holl d'ar maro va gwall heskinourien :
Ha diskouezit breman, madelez em c'henver,
Rak me 'zo, va Doue, ho leal servicher.

(1) Ar Psalm kenta a binijenn a gavoc'h e Krouez Breiz, miz mez-ven 1948, p...

**Dalc'hit dieub an 22 a viz eost : ezomm a vo
ac'hanoc'h e gouel ar Bleung-Brug, e Kastell-Paol. Eun
devez kaer e vo !**

EUR SKOUER

Marc'harid, merc'h d'eur c'higer eus kêr York, e Bro-Zoaz, a voe ganet wardro ar bloaz 1553. Pemp bloaz bennak he doa d'ar mare ma, savas war dron Bro-Zaoz ar Rouanez Elisabeth, hag a die ren 44 vloaz, en eur ober brezel d'ar relijion gatolik : e 1570 e voe eskumunuget Elisabeth. Er bloaz warlerc'h, Marc'harid a zimezas gant Yann Clitherow, kiger pinvidik-mor ha protestant : Marc'harid a oa ivez protestantez, met tri bloaz goude he dimezi e troas gant an Iliz katolik.

Difennet oa d'ar mare-ze kunat beleien gatolik, dindan boan a varo. Marc'harid a gendalc'has d'hen ober koulkoude, hag ouspenn-ze, e lakeas unan eus he bugale war studi ar velejiaj e diavaez bro.

Eun devez e voe dizoloet an toullkuz he doa kinniget d'eur beleg en he zi : Marc'harid a voe toullbac'het.

« Peadra ho peus graet d'ho kas d'ar groug », a voe lavaret dezi. Hag e respontas war an taol : « Me, garfe kaout eun dra dalvoudus bennak da rei d'eoc'h evit ar c'helou mat-se Kemerit da vihana an tamm dilhad-mañ, n'am eus ket gwelloc'h da rei deoc'h ». Laouen-meur oa o soñjal e rofe he buhez evit Jezus-Krist.

Pa voe kaset dirak ar varnerien, ne fellas ket dezi en em zifenn.

En amzer-ze, an neb a nac'he en em zifenn a veze barnet d'eur maro kriz meurbet : lakaet e veze da c'hourvez war eul leur vein, goloet e veze gant eur blankenn, ha war ar blankenn e veze berniet pouezioù bras. Goude tri devez tremenet evelse, e veze berniet pouezioù all betek frika ar c'horf.

Hogen Marc'harid he doa aon na deufe he bugale da zougen testeni enep dezi, d'ober evelse dizenor o zud ha da drei kein d'an Iliz katolik. Setu perak e tibabas eur seurt maro, kentoc'h eget en em zifenn ha beza krouget. Gouzout a rae n'he doa da c'hortoz nemet ar maro, nemet nac'h a rafe e feiz katolik : kement hag ober, e c'houzañve eun tammig muloc'h a boan !

D'ar 15 a viz meurzh 1586, e voe barnet eta d'ar maro kriz a c'hortoze. O klevout ar zetañs, e lavaras d'he barnerien : « Peogwir eo an dra-ze ar zetañs a zougit hervez ho kous-tiañs, me 'bed Doue d'ho parn egiz n'ho peus va barnet. Bennoz dezañ en araok ! »

Marc'harid a voe kaset en dro d'an toullbac'h, evit tremen an dek devez a jome ganti da veva.

Laouenn kenañ oa.

Evelato e tisplije dezi ar zoñj e rankfe beza diwisket dirak an holl araok beza astennet war al leurenn :

en eur furchal, e kavas lien d'ober eun hiviz hir a-benn deiz ar maro.

Marc'harid a anaveze he sempladurez, ha ne lakae he fiziañs nemet e nerz an Aotrou Doue. Pedit a rae hep ehan.

Kalet oa ar stourmad : poan a veze graet dezi e pep doare, ha dispennet he brud. Diaes e kave kuitaat pried ha bugale, yaouank oa c'hoaz, hag e sante c'hoant bras da veva. Aon a grogas enni rak ar maro, aon bras. — Evit chom trec'h warni-he-unan e yunas.

En abardaerz diweza, e voe gwasket muioc'h eget biskoaz gant an enkrez. E-kreiz an noz e savas, e lakas he hiviz-lien, hag e chomas meur a eurvez da bedi war he daoulin. Eur wech all e savas c'hoaz, hag ez eas d'en em astenn war vein an oaled, e-lec'h ma chomas eur c'hardeur bennak : evelse e teue a-benn da ginnig he buhez da Zoue.

Kenerzet evelse, edo seder adarre pa deujod da gerc'hat anezi evit mont d'ar maro.

En em gavet war al lec'h, e pedas evit an Iliz, ar Pab hag ar briñsed kristen, hag ivez evit distro ar Rouanez da Zoue.

Unan eus he gwardou a lavaras dezi : « Itron Clitherow, ho pet soñj e varvit abalamour d'ho trubarderez, hag añaavit n'eo nemet ar wirionez ». Hi a respontas gant nerz : « Nann, nann, aotrou serjant, mervel a ran dre garantez evit Jezus, va Mestr ».

En em astenn a reas neuze, he divrec'h e krouaz, eur maen lemm dindan he liven-gein. Lakaet e voe warni eun nor hag a c'holoe he c'horf a-bez. Pa zantas an nor o poueza warni, e lavaras : « Jezus, Jezus, ho pet truez ouzin ! »

Eiz kant lur bennak a voe berniet warni dioustu, daoust ma n'oa ket ar boaz d'ober evelse. Abenn eur c'hardeur bennak e varve ar verzerez kalonek, flastret ha mouget dindan ar bec'h.

Pedomp anezi da c'houlenn deomp eklerijen da gompren pegen kaer eo mervel evit Jezus-Krist.

ARZEL GERVOVAN.

GLOADA AR BRAS

*« Diou, teir amzer en deus an den,
N'int ket heñvel an eil ouz eben. »*

a lavar an ditour koz.

N'ouzon ket ha teir amzer a vezo evit Glaoda ar Bras, met diou a zo bet da vibana betek-hen.

Glaoda a oa mab e dad ! Ganet en eun tiegezh hag en defe graet mez da vrasderiou Keroullas, e oa penn-her war ar marc'had, ha lorc'hus, lorc'hus : eur « bern-teil », evel ma lavarer du-mañ. Ar goueriu bihan eo a-ra ar steriou bras : e Glaoda, ar penn-her, oa deuet d'en em deurel, a-leun, an diou wazenn a lorc'h a rede, eus an eil rummad d'egile, e lignez e dad hag e lignez e vamm. Ha pegwir ar ouenn a denn Glaoda, a rede eus e wella war an hent merket dezañ gant e dud...

Bras oa Glaoda e gwirionez, ledan evel eur armel eus ar seitekvet kantved, kov-teo ha gouzoug founnus, penn ruz-tan ha bleo dispak ; ha, dindan ar peul, diswesker ken teo hag ar pilhiri a zougen toenn e garri ! Chadenn-aour o lintra war e gov-teo, da zul, evit mirout outañ da strakal moarvat, ha gwigour gant e voutou-ler pa dreuze an iliz eus an eil penn d'egile, da gloc'h an oferenn-bred, evit dont da gemer e blas, er renk kenta a gadoriou, evel just ! Eur c'hianfard, pa lavaran deoc'h !

Mar doa Glaoda eur pabor, n'oa ket hep her gouzout e-unan. Eur gordenn deo en doa staget ouz e gloc'h bras, hag hemañ a veze alies lakaet e bole, aliesoc'h eget kloc'h an Angelus : « ha me » en tu-mañ, « ha me » en tu all. « Me rafe an dra-mañ, me ne rafen ket an dra-hont... Evidoun-me, ne vefen ket nec'het... Ar Mer n'eo nemet eur genaoueg... Ar Person, (hemañ n'oa ket bras awalc'h da veza anvet « Aotrou » gant Glaoda), ar Person 'ta n'eo nemet eur paour-kaez den... Rener ar Republik e-unan ne wel ket hirroc'h eget beg e fri, eun darzod n'eo ken... Ma vefen bet mer, me, ya, me Glaoda ar Bras, ho pefe gwelet an traou o sutal er barrez, n'eo ket evel bremañ ! Amañ e vefe bet eun hent bras, pell 'zo ; al labour-douar a yafe war araok, hag ar c'henwerz en defe baleet !... Ma vefen bet e plas ar Person hirio er gador-brezeg, am befe distaget, n'eo ket eveltañ, war gein ar yaouankizou direol : peuh ! eun taolig skrab en deus roet, ha netra ken ; skel a ranker koulskoude, ha skel kalet !... »

Ha m'ho pefe klevet teod Glaoda o strakal, pa voe kollet ar brezel e 1940 ! « Ma vefen bet eno, emezan, am befe brüzunet ar Boched, kentoc'h eget kila treuz eur paz : ar re yaouank, hirio, n'int nemet mec'hieien ! » An holl a oar, pell 'zo, eo Glaoda gounezer ar brezel 1914-1918, ha nann Bro-C'hall pe Amerika... Daous h an'eo ket bet anvet soudard kenta klas, evit e zervij a geginer en e grompagnunez ?

Hag e diegezh 'ta, e pelec'h mont da glask e bar ? Eun douar bras ha druz, chatal eus an dibab ha lart-toaz ; an irvin a veze re vras da lakaat er pod-soubenn da zul ; rabez a veze d'ober teil bep bloaz, laez a varikennadou... A vec'h ma ne zofe ket ar yer diou wech bemdez !

Evel just, n'oa ket kennebeut dre ar vro a-bez, gwelloc'h na kaeroc'h bugale eget Kaour hag Anna, mab ha merc'h Glaoda. Hirroc'h rankennad a weler e meur a lec'h, met « an dalvoudegezh, eme C'hlaoda, an dalvoudegezh ! ar spered, ar gened » ! « Kaour, va mab », hag « Anna, va merc'h », a oa anavezet o ferziou mat gant an holl, rak ma ne vezent ket embannet gant kilhog an tour na gant an tabouliner, eo abalamour m'oa awalc'h gant Glaoda e-unan d'ober brud dezo... Klaoustre, a zofje an holl, ne zimezo Kaour nemet gant merc'h ar mer, hag Anna gant eun ofiser pe eun alvokad bennak...

Gwir oa moarvat ar peb brasa eus ar meuleudiou a roe Glaoda d'e dud ha d'e draou : tiegezh dispar en doa savet, ha renet mat an dud ennañ... Met re a vrasder hag a ourgouilh a zegas yenienn. Glaoda n'oa ket karet gant an

dud. Morse n'oa bet dibabet gant ar barrez da gemer eur garg bennak, ha dor an ti-kêr ha kador ar m'ar a jome bep tro stanket outañ. « An avi », eme C'hlaoda ! N'en deus kavet den ebet c'hoaz war e hent da zisplega dezañ, e toull e zaoulagad, e ra droug d'e vrud dre an dismegañs a daol war an holl ; Glaoda, an den a wel sklaer, war e veno, a zo dall mat war ar poent-se !

*« Madou 'zeu ha madou 'ya,
Evel moged, evel pep tra. »*

Setu komzu ar furnez koz.

Eur c'hantik, kanet alies awalc'h gant Glaoda, a astenn ar gaoz :

*« Buhan ya an amzer :
Tremen ra pep tra :
Nerz, madou, yec'hed.
Yaouankiz ha gened,
Tremen ra pep tra !*

Met Glaoda ne gane ar c'homzou-ze nemet evit ar re all.

Kendalc'het en deus da vralla e gloc'h bras ha da facha war ar gordenn betek m'eo faoutet ar c'hloc'h ha torret ar gordenn !

Tremenet an hafiv bras, setu deuet an diskar-amzer !

En eun doare sebezus, tamm goude tamm, eo aet stal C'hlaoda da stalig, ha nebeud e kendalc'ho ar morzol da skel, ez aio ar stalig da netra !

Gwall bounner eo bet an taol morzol kenta : eur gazeg yaouank, bet re a gerc'h dezi, a ziroll ouz ar c'harr bras ; ar paourkaez Kaour, flastret dindan ar rod, a zistro da varadoz an Aotrou Doue.

Da heul ar maro kriz ha trumm, e teu kaoñ ha glac'har en ti : n'oa mui laouen ar vuhez evit ar familh... Anna, bet atao pennig-skafiv, ne harp ket pell ouz an dristidigezh ; en eur barrad kounnar, he deus dastumet he zammig stal evit mont e kêr da redek warlerc'h al levezek kollet.

Anna n'he deus ket kavet ar pezh a glaske, met n'he deus ket kavet muloc'h, abaoe, an hent da zont d'ar gêr. Setu m'eo aet da get en nebeut karantez a zalc'he c'hoaz Glaoda evit buhez ar bed-mañ hag al labour... Perak poania ha labourat wardro an tiegezh hag an douar pa'z'alo, sur awalc'h, an tiegezh ouz ar mogerioù da varo ar re goz ?

Glaoda a lez eta an traou da vont evel ma karont : kredi a ra en devezo atao peadra d'ober e dreuz... Met an douar, graet goap outañ, a gas an dorz d'ar gêr : draog, bozenn hag evelzenn evel cost !

Er c'hrevrier, n'eus mui nemet gagnou : horjella a ra ar c'hezeg war o divesker, poan dezo o sach a war o-lerc'h ar c'harr goullou. — Dizec'het eo ivez feunteun al laez er c'hraou-zaoud : « eljenned Glaoda » a reer anezo bremañ dre ar vro !

Ar mestr e-unan ne dalv ket kalz gwelloc'h eget e diegezh : teuzet ar c'hov, dastumet ha daougroummet ar c'hein, goullou ar bragou... Staga 'ra Glaoda d'an hini ruz, ha zoken d'an hini-kreñv, war a lavarer... Ne gred mui komz ouz den, gant aon rak an teodadou flemmus.

Rak, daoust d'e drubuilhou, Glaoda ne gav ket c'hoas kalz a dud d'e druezi ha d'e frealzi : ar garantez a-berz an den a zo tra ziaes da c'houit, siouaz, ha gwall dost emañ c'hoaz dismegañsou an amzer iremenet !

P'en devezo Glaoda soublet pell awalc'h d'ar boan, ha digollet dre izelegezh e galon, an ourgouilh a-wechall, neuze moarvat e kavo tud d'e harpa ha d'e gennerzi : n'eus droug afizavet, anavezet, ha ne gavfe ket e louzou ! Emañ Glaoda war hent ar pare : skrivet eo e c'hlac'har bremañ war e dal, hag an holl a c'hell, war e benn stouet, lenn ar c'heuz diwezat d'ar faziou koz.

Klaoustre e kavo, pa vo koezet ar goañv bras war e galon, tanflamm ar garantez da domma, rak an dud ne badont ket da jom kriz !

Met perak ivez eo bet, gwechall, ker bras Glaoda ar Bras ?

FALC'H-AR-PRAD

Kantikou ha kantikerien Breiz-Izel

Gant Loeiz Lok

« Ra vezo benniget Doue, e brezo-neg, betek fin ar bed ! » Ar geriou-mañ a gaver e levr an Tad Maner « *Le Sacré Collège de Jésus* », p. 16, (1659). An Tad Maner a roe ennañ kenteliou kristen d'ar veleien evit o zikour da ren eneoù o farrizioniz. Deskit dezo, emezañ, gwirionezou ar Feiz dre ar c'hantikou. Goude beza displeget eur c'houblad, lakit an daou ganer gwella d'e gana ; ar baotred a gano war o lerc'h, hag ar merc'hed goudeze. Ar c'henta kantik da zeski eo hini ar Feiz, hag a zo el levr « *Kantikou spirituel brezonek* » : Adoromp an Drindet bremañ ». Da eil, an akt a gontrision : « Ouzoc'h, Doue, me gofessa » ; da drede ar Bater, an Ave, ha d'o heul, gourc'hemennou Doue hag an Iliz, an doare-kofes, an doare d'en em lakaat e stad da gomunia ha da drugarekaat Doue goude ar gomunion : goudeze, tri japeled ar Rozera, Litanioù ar Werc'hez, Kantig Theophilus hag e zistro da Zoue, exercisou ar mintin hag an noz, pevar fin an den, hag ar remejou eneb pep pec'hed kapital ».

« Ouspenn-ze, emezañ d'ar veleien, kuzillit d'ar gristenien teurel a gostez kanaouennou ar bed, ar re louz, ha kana ar c'hantikou spirituel er gêr, er parkeier, war an heñchou : kement a vad a reont d'an eneoù eget pedennou. Pedit ar gemerierien hag an artizaned d'o c'hana ha d'o deski en tiez ma 'z eont enno da labourat. »

★ ★

Sofjal a c'hellit n'oa ket an Tad Maner ar c'henta eus ar c'hantikerien vrezonek. Nebeut a dra a ouzomp koulskoude eus ar c'hantikerien en e raok.

JIL a GERAMPUIL, person Kleden-Poher (1530 ? - 1578), en doa savet *Heuriou brezonek ha latin*, wardro ar bloaz 1556, hag eur « *Catechism hag Instruction eguit an Catoliquet* », e 1576, enno pozioù da veza kanet.

Da skouer, setu poz kenta ar Bater :


*Hon tat pehenny so en neffuou
Roue ha crouer d'an holl madou,
Diguenech, heb sy, ez dinou.
An froez d'n holl madelezoù.*

★ ★

Diwezataoc'hik, TANGUY GUEGUEN (15...-1632), « belec hac organist natiff a Leon », hag a oa ograouer e I. V. - Vur e Montroulez, a lakas moula *Doctrin ar Christenien ha Nouelou ancient*. — Advoulet eo bet e Nouelou hanter-kant vloaz 'zo.

Ar Stabat Mater a zo skrivet evelhen en Doctrin :

*Ouz hars an Croas ma' foue gloasct
Doue hon Roue ny crucifiet.
Ez edoa e mam estlamet
Ha hy e dyffout hyruoudet.*



AN TAD MANER

★ ★

Aes eo gwelet ne veze ket skrivet ar brezoneg evel ma oa komzet.

An TAD MANER a heñchas an doare-skriva, hag e teuas ar skritur da veza kals heñveloc'h ouz ar gomz.

Ar gantikerien en e raok a veze boazet da staga toniou gallek ouz o c'hantikou. Etouez Nouelou Tanguy Gueguen ez eus unan war don : « *Courtoises dames* », eun all war don : « *Quand l'Empereur de Rome arriva dans Paris et Marseille la jolie* ».

An Tad Maner, dre m'oa an dud troet da gana kanaouennou gallek, a roas d'e gantikou stumm o gwerzioù, hag a gemeras an toniou gallek brudet en e amzer da zervic'ha d'e gantikou, da gals anezo da vihana. War 39 kantik a zo er C'hantikou spirituel (1642) aozet, a greder, gant an Tad Maner, ez eus 19 war doniou gallek.

Pet kantik en deus savet an Tad Maner ? N'ouzer ket mat.

E levrioù kantikou (*Kantikou spirituel, Kenteliou kristen, an Templ consacret da Jezuz-Krist, h.a...*) a zo bet advoulet meur a dro. Kaout a reer enno avat kantikou savet gant tud all. Eus e re e-unan, ez eus 6 e levr nevez Kantikou Eskobti Kemper ha Leon.

N'en dije ket an Tad kemeret kement a boan da zevel kantikou ha d'o deski d'ar Vretoned ma ne vijent ket bet eur benveg eus ar re wella da zifraosta ar sperejou. Lenn a reer en e vuhez : « En eur stad trist edo neuze Breiz-Izel. Brezel a oa bet. Ar zoudarded, darn anezo protestanted, darn all katoliked hep doujañs Doue, o doa degaset skouerioù fall ha dizurzioù e pep korn eus ar vro. Ar vezventi, egiz eur rouanez, a rene war an holl, bras ha bihan, paour ha pinvidik. An deverioù kristen n'oant mui, kouls lavaret, anavezet gant den ebet ken. E pep lec'h, ne glevet nemet basfemi, jarnéal, toudi Doue, kana sonioù fall ; e pep lec'h weled an dafisoù sul, an nozvezioù, al laeroñsioù, ar muntrezere zoken ha bep seurt fallagriez.

Kantikou an Tad Maner a lakeas tud a villierou da zistrei da Zoue ha d'ar vuhez kristen.

Kelenn ar bobl dre ar c'han a oa eun nevezenti, en doare da vihana ma rae an Tad implij anezañ. Pep nevezenti a gav rebochoù peurliesad. Setu ma voe tamallet an Tad Maner.

E 1640-1641, an Tad a roas mision e Molenez hag e Eusa. « Kan ar c'hantikou a dalvezas eno muloc'h eget ar prezeg », a lenner en e vuhez. Mikael an Nobletz, hag en doa heñchet an Tad Maner da veza misioner hag a oa kantiker e-unan daoust ma n'en deus lakaet moula levr-kantikou ebet, a skriva d'an Tad Bernard, kenell an Tad Maner : « Beza desket da Eusaiz, e pemzek devez, ar c'hantikou spirituel, pemp kant rimadenn, ha c'hoas war toniou disheñvel an eil diouz egile, kement-se a zo brasoc'h burzud, hervez va c'hredenn, eget rei ar vuhez d'eun den maro ! »

Kement a vrud a zavas koulskoude wardro ar c'hantikou hag an taolennoù ma voe kavet unan bennak da lakaat Aotrou 'n Eskob Leon, an Ao. Cupif, d'o c'hondaoni.

Setu ma voe ret ehana, epad eun nebeud amzer, da gana ar c'hantikou.

Dre c'hras Doue, eur beleg a yeas da gaout an Aotrou 'n Eskob, hag hen difazias. Glac'haret e voe an Ao. Cupif da veza graet poan d'eun den santel evel an Tad Maner. Eus e berz, e pignas eur beleg er gador, da ziskleria ar wirionez, ha da veuli ar visionerien hag ar c'hantikou spirituel.

An Tad Maner a yeas da gaout an Aotrou 'n Eskob : hemañ a reas dezañ degemer mat hag a lavaras dezañ : « Ret e vo deoc'h dont ganen er penn kenta eus ar goafiv evit deski din ar brezoneg ; rak anez, a lavare an Aotrou 'n Eskob en eur vouz c'hoarzin, e kondaonin adarre ho kantikou ! »

Anat eo, mat oa ar benveg, ha mat ivez al labourer !

(Da genderc'hel).

ISTOR BREIZ

gant an Ao. Poisson

Rakskrid gant Dom Alexis.

Levr tev 400 pajenn, jn-8 rezin.

GWRIET :

300 lur (mizou kas : 25 l.)

KEINET

(lien) 700 l. (1er bazan) : 800 l.

(Kein chagrin gant tresadennoù keltriak) : 1.100 l.

(Mizou kas : 50 l.) Spisaat al liv.

AU LIVRE D'HEURES

D'ANNE DE BRETAGNE

(Reliure d'Art Celtique)

55, rue La Fontaine

Fontenay - aux - Roses (Seine)

**Diwallit ho chatal
Klozit ho parkeier**

SOC'LA CLÔTURE ÉLECTRIQUE
30 rue Saint-Augustin - Paris (2^e)

KOEF PE DOK ?

TOK PE GOEF ?

E pep parrez a Vreiz-Izel
Eo digor hirio ar brezel
Etre merc'hed hag a zo klok
Pe 'vit ar c'hoef pe 'vit an tok.
Rannet int e diou gostezenn ;
Da behin ? vo ar zeizenn ?

War a gonter, Lizig an Dreff
A daol he zok 'vit mont e koef.
Hag, en enep, Jaketa Rok
A daol e c'hoef 'vit mont e tok.
Hag ar baotred da glaoustra
Etre Lizig ha Jaketa,
Etre koefa da digoefa
Etre toka ha didoka.

Lizig 'zo bet war ar studi ;
Diskouez a c'hell an testeni
Ez eo diwech belc'hleourez, (bacheliere)
Ha daoust da ze keginourez. (cuisiniere)
'Dai ma 'z eo hi chomet er gêr
Eo bet he zok d'ar pilhaouer ;
'Deus ket klasket ober eun trok
Gant eur c'hoanteg da vont e tok.
Prenet he deus koefou lien
Da joucha brao he bico melen,
Ha kolierou gant dantelez
Dem hevel ouz eskell aelez.
Hirio gant he giz Vreizadez
Ez eo Lizig par d'eur brinsoc.
An holl breman ouz he gwelout
Hep fazia c'hell lavarout :
« Hounnez a zo diouz lec'h-man-lec'h. »
Da ziskuilh gouenn, ar c'hoef a drec'h.
Pa ya breman d'ar pardonion
Warni eo e kouez ar zellou.
— « Na kaerat plaegh, Lizig an Dreff
Gant he c'hoef ha gant he c'hoef ! »
Setu komzoù hag a giever
Aman-ahont pa dremenar,
Dreist-holl mesk ar baotred yaouank
A zeu da dremen stank ha stank.



Unan avat hag a zo klanv
Ha prest da wiska dilhad kany
Eo, a dra sur, Jaketa Rok,
'Zo bet e kêr o prena tok...
Petra 'fell deoc'h ? Trist eo dezi
Kosaat bemdez hep dimezi.
Kredet he deus e kavfe gwaz,
Aroak tizout daou-ugent vloaz,
Ma c'hellfe mont e dimezell,
Lakat liou ruz war he muzell,
Eur c'hroc'henn goz war he c'herc'henn,
Hag eun tokig war gern he fenn.
D'an nev'amzer, raok ar zù Fask
Jaketa 'gav ar pezh a glask :
Eun tokig koant a dri c'hant skoed
Sur da zacha sell ar baotred,
Pa vo douget....

Aze an dalc'h.

Jaketa jom eur pennad, bale'h,
D'ober he souj... Abenn eur miz
'Zo lakaet dervez da jench giz.
Ha da c'harto, diwez bemdez,
Hi 'welo penaos e tigouez
An tok, dirak ar meleziour...
Sae'h an dienn !... Pebez labour !
Penaos e vo lakaet an tok ?
Aze a-drenv ? Aman a-raok ?
War an tu dehou ? War an tu kleiz ?
War lein ar penn, eun c-kreiz ?...
Pebez kudenn n'eo ket eta,
Lakaat eun tok, o Jaketa.
Penaos 'ra-hi gant he divrec'h,
Gwechou d'an traon, gwechou d'an nee'h,
Ha klas a ra gant he daou zorn
Lakaat he bleo da jom koujorn.
Setu aze eun taol « jinnaz »,
E-pad ma lueh he lagad glaz.
Da zellet ouz Jaketa goant
Er meleziour, seder ha drant.
Ha pa'z eo skuiz e ro eur pok
D'an dimezell ken brao e tok.

En em doka e-barz ar c'hud
A zo aes... Met, dirak an dud ?
Ha Jaketa, tenval he fenn,
A zoug bepred he c'hoef lien,
'Baoe m'he deus Lizig an Dreff
Stlapet he zok ha lakat koef.
— « P'escurt ezom he deus Lizig,
Eur plac'h yaouank ha p'avidik.
Da vont e koef ? en eur jench giz
Ne ra 'met lamm war he c'hiz...
Met marteze e fell d'ez,
Mirout ouzin da zimezi ?
Gwelet e vo... 'Benn an Dreinded
Jaketa Rok en do pried....

Met deñt eo sul ar Zakramant ;
N'eo ket chenchet he gwiskamant ;
An tok a jom, 'korn hec'h armel ;
Ar c'hoef-lien 'chom 'n he c'habell
Hag ar pried, plou 'oar pelec'h....

Ar c'hoef d'an tok a zo bet trec'h....

DALC'HIT, MERC'HED, DA C'HIZIOU BREIZ
INT HO TALC'HO START EN HO-FEIZ.



Soñjal a riz neuze pegen didalvez eo d'an den, beza re stag ouz traou ar bed-mañ. E pegen berr amzer e vezont lakaet e ludu.

Nann, forz ebet, ne ris mui eus an dismantrou, pa velis dirazon va mamm garet, Liz hag Annaig. Na pebez levenez ! en em welout adarre goude eur seurt daryoud !

Va mamm koulskoude, o welout ar stad m'eo lakaet an ti, n'eo ket evit mirout da lavarout d'in : Pebez gwalleur, va merc'h kaez !

— Ya, eme, gwalleuriou bras a zo erruet, gwir eo, met p'eo chomet hor buhez ganeomp holl, arabat deomp en em jala re.

E-keit m'edomp oc'h arvesti ouz an dismantrou e teuas, betek ennonp ar c'helou, n'ouzon dare penaos :

Emañ ar « Boched » o vont da flastra ar bourg ! »

Setu avat, prestik goude, an tennou da grozal a-nevez.

Ni, a c'hellit kredi, ne somjomp ket, da varc'harta war-dro ar ger. Mont a rejomp a-dreuz-didrouz war-zu ar foenneier, o kas ganeomp an diou vloc'h chomet disbiñk, war ar peder a oa er c'hraou.

En eur vont evel-se, evel tud penn-follet, n'oamp darbaret nemet gant hor buhez hepken, chomet ganeomp betek-ben evel dre vuzud.

A-greiz holl, avat, va mamm a jomas a-zav e-kreiz ar vanell.

— « Daoust, emezi, ha ne vije ket furoc'h da unan pe unan ac'hanomp, distrei da gerc'hat ar pez a arc'hant hon eus ? »

— « Petra ? eme Aogust, mont da riskla ar vuhez evit arc'hant !! Nann, nann, n'emañ ket ar poent : »

Soñjal a ris neuze e ranjkemp adarre beva, ha kaout eur gwennege ben-nak evit gellout prena a-nevez ar pez a vije ret.

— « Mat, eme da Aogust, eur zofj vat he deus va mamm. Mont a ran va unan-da gerc'hat an arc'hant. En eur lakaat ar skeul ne vo ket dises d'in mont er soller.

Annaig a zeuas ganen ivez. Ar skeul a voe kavet, ha prim e savis er zoller. Ne jomis ket, avat, re-bell da zellout ouz an traou torret. Gwelout a ris, koulskoude, va mekanig da wriat, a-stok-korf war leurena ar gambr. An daou bres a oa digor frank, pep tra diskempenn enno, hag endro dezo. Bresa a rankis meur a dra, zoken a-barz tizout ar valizenn bresius. Rak va mamm eur pennad a zo, he doa renket ar pezig he doa en eur valizenn, gant aon na vefe ranket tec'hout diwar-herr eun delz bennak. Hirio e welen sklaer he devoa graet mat oc'h ober evel-se.

O welout digor an armel, eun nor d'ezl torret, em boa evel son o tostaat outi.

— « Daoust ha ne gavin ket goulo ar valisenn ? a zonjen, enkrezet.

O welout ar valizenn en he flas e voen laouenaet. Kregi a ris enni buan-buan ha gant mall e tiskennis, dizammnet o welout ne oa ket goulo.

Ne voen ket pell a kaout ar re all, E traoñ park-leton ar Feunteun-Veur edont en sur foz doun, kuzet mat war lez ar foenneier,

Va zad, gloazet en e vorzed, hag an If Kombo, gloazet ivez, o daou o tont eus ar Feunteun-Veur, en em gav en eur jilgamm, en hon toull-kuz. Job hag Aogust a oa aet da gerc'hat an If Korr ; dougen a rankjont an den gloazet war eur c'hraevaz ; dont a raent goustadik kenañ, rak an distera stroñs a rae dezañ youc'hal gant ar boan. E zremm a oa dislivet evel pa vije o vont da vervel. Klemm a rae hep ehan. Gortoz a rae al louzaouer. Met, allaz ! ne zeue den !

Lakaet e vos ganeomp war eur bern pallenou, a rae dezañ evel eur gwele soupl ; met kement-se ne vire ket outañ da glemm ha da c'hrouzafiv.

Meur a wech eo bet war-nes sempla ganeomp. Neuze a walc'hemp dezañ e zremm gant dour yen, evit e zerc'hel divorfil.

Medisin ebet ne zeue atao !...

da gendec'hel

Lennit

ALAIN DE CORNOUAILLE : PENHOAD. (Spes, Paris 1947. 442 pages).

GWENNAEL (aotrou Cozannet) : KLOTENNOU BREZONNEK. (1948). (Her goulenn digant M. l'abbé Luguern, directeur de l'Ecole Saint-Joseph, Plabennec (Finistère)).

E gwerz e ti : « Ar Vuhez Kristen », Couvent des Capucins, Roseoff (Finistère).

C. C. 269-81 Nantes

(ar mizou-kas azo ouspenn ar priz merket)

Buhez Hor Salver Jezuz-Krist, gant an Ao. Uguen hag an T. Eujen.....	300 l.
Ar Werc'hez Vari, gant an Tad Medard.....	100 l.
Fatima, gant an Tad Medard.....	100 l.
Sant Fransez a Asiz, gant L. Inizan, kresket gant an T. Eujen.....	200 l.
Blemlou Sant Fransez (Fioretti).....	100 l.
Buhez skeudennet Sant Fransez, gant Fransez, gant an T. Eujen.....	80 l.
Sant Fransez, mignon ar vugale, gant Breur Melar.....	60 l.
Ar grasou pe ar pedennou dirak ar re varo, gant y ar Go.....	100 l.
Prezegennou war Drede-Urz S. Fransez (2 leor), gant an T. Eujen.....	60 l.
Santez Elizabet a Hongri, gant an T. Eujen.....	15 l.
An oferenn displeget gant skeudennou, gant an T. Eujen.....	20 l.
Levrig-dorn Trede-Urz S. Fransez, gant an T. Eujen.....	30 l.
Diwar c'hoarzin, gant an T. Medard.....	100 l.

C'HOARZOMP C'HOAZ

GERIOU-KROAZ AL LAGAD-DU.

Ar gerioù-kroaz-mañ a vo graet ganto eur genstrivadeg (concours).

Ouspenn eur respont a zo dezo : n'eus nemet unan heg a vo kavet mat evit ar genstrivadeg.

PETRA DA OBER ?

1. — Klaskit ar respont, eveljust ! Dindanan, skrivit sklaer hoc'h ano hag ho chomlec'h.

2. — Lakit, da heul, tri dimbr a zaou-skoed (18 lur) evit pep respont dishenvel a zegasit.

3. — Kasit ho lizer da : M. l'abbé Falc'hun, professeur au Grand Séminaire, Quimper (Finistère).

PRIZ DA C'HOUNIT : Etouez ar respontou mat, e vo tennet d'ar blouzenn evit gouzout gant piou ez ay ar priz a 200 lur.

N. B. — Al liziri a ranko beza degouezet d'an 20 a viz gouere, da zibezata.

Setu ar gudenn da ziluzia evit an dro-man :

DIVINADENNOU.

1. — Piou a zo mab d'ho tad hep beza ho preur ?
2. — Petra a zoug e vantell hanv-c'hoanv ?
3. — Petra a c'hell beza en eur c'hodell c'houlo ?
4. — Petra a vez e ivinou bepred di-razan pa vale ?

	1	2	3	4	5
1					
2					
3					
4					
5					
6					

A-blaen :

1. — Plantenn hag a ro danvez-herdin.
2. — Ret eo kaout anezan evit mont da jaseal.
3. — Lizerennou kenta an Testamant nevez (a gil). — An toaz a dremen dre ar stad-se.
4. — Graet e vezont er perkeier.
5. — Lakaat war eur roll.
6. — Diou vogalenn (voyelles). — Eur ger-mell (article).

A-zerz :

1. — E-leiz a gan.
2. — Den gwisket kran.
3. — Lizerennou kenta an Testamant nevez (a gil).
4. — Mont war ar c'hiz.
5. — N'ec ket maro. — Ger-mell (article).

KELEIER

Gregoriel.

E Kemper hag e Montroulez ez eus bet eun devez-studi evit ar c'han-iliz pe kan E Montroulez, d'ar 15 ebrel, e oa 22 strollad a ganerien hag a ganerezed.

E Kemper, d'an 22 ebrel, ec'h en em vodas 44 strollad, e kaerderiou an Iliz-Veur, evit deski gwelloc'h penaos rei da Zoue muioc'h a enor, e levez ar c'han : 1200 mouez yaouank a leunas an Iliz-Veur gant eur mor a gan. Dom Laurans Gougay, mestr-kaner manati Kerbeneat, hag an Ao. Marrec, rener ar c'han e Kloerdi bras Kemper, en em gargas da zisplega reolennoù ar c'han gregoriel, hag a henc'has ar ganerien epad an ofereñbred har ar gousperou ; an Ao. Pondaven, ograouer an Iliz-Veur, a roas d'ar c'han harp flour ha galloudus e ograou bras.

D'an ofereñbred, Dom Felix Colliot, Tadabad Kerbeneat, eun dudi e glevout, a lavas d'e zelaouerien penaos int karget, evel an uhela krouadurien, da gana gloar an Ao. Doue en ano an holl grouadelezh.

Ar gouel a oa renet gant an Aotrou 'n Eskob Fauvel e-unan, ha gant an Ao. Vikel-bras Cadiou, a zavas gwechall strollad kanerien an Iliz-Veur.

Goude ar gousperou, an Aotrou 'n Eskob, a reas e c'houre-hemennoù d'arganerien, hag a c'houlennas diganto kenderc'hel da gaeraat muioc'h-mui dre eur c'han dudius, al lidou sakr en Eskobti.

BOURD HA FARS

KLEVET 30 VLOAZ 'ZO :

Eun devez - mous oan c'hoaz - e teuas Yann an Enez-Krist du-mañ da glask e zoubenn hag e loj. Edo o varmoti e-toull an nor, nemet ne gawe ket d'in oa katolik e Bater. Setu amañ e Bater en dro-ze :

- « Evelse bezet graet ».
- « Pater noster, Gwoullou boud,
- « Et an taro en e roud.
- « Hag ar mevel war e lerc'h
- « Gant eun torchad kolo-kerc'h ;
- « Pa voe'n em gavet' penn ar straed
- « Ne ouie dare 'pelec'h oa aet.

KLEVET EUR MIZ 'ZO :

- « Re wir, Perig, n'out ket bet o laerez spezard e lioz ar presbital ?
- « O nann, Aotrou Person !
- « N'out ket bet zoken o soñjal mont ?
- « O nann, Aotrou Person : n'int ket dare awalc'h c'hoaz ! »

SANTEZ ANNA, AR PALUD

D'an 13 a vezeven, eo bet diazezet ha benniget gant an Aotrou 'n Eskob Co-gneau ar maen kenta eus ar japelig a vo savet, ouz chapel vras Santez Anna ar Palud, e Plonevez-Portzay. Er japelig-se, e vo laketa an Aoter vras a servicho da lavarret an ofereñbred da zeiz ar pardonioù, pa vez re a dud evit gellout kaout plas er japel. — War a lavarer, e vo din al labour emeur o sevel eus santelezh « Hor mamm, Santez Anna », hag eus kaerder an tevennoù galloudus a ro goudor d'al lec'h benniget. — Na pitius e vo c'hoaz mont da bardon Santez Anna !

Ar japelig a vo savet gant mein ar mengleuzioù dispar a gaver dre hor bro ; eun aoter-vaen, hag he devezo ouzpenñ tri metr-hirder, a vo diwallet, en he mured, dindan bolz ar japelig.

Gouel an 13 a vezeven en deus roet an tawad eus ar gouel bras a vo lidet d'an 1 a viz east, pa deuo an Aotrou 'n Eskob Fauvel, da gonsakri an aoter nevez.

D'an 13 a vezeven, eo bet kanet an ofereñbred gant an Ao. Chaloni Helou, sekretour-meur an Eskobti ; an Ao. F. ar Go, person Kernevel, a ganas, en eur brezegeñbred dudius, meuleudioù Sent Breiz.

FOAR-DISKOUZADENN KEMPER.

Eus an 29 a viz mae betek ar 6 a vezeven, ez eus bet, war hent Locmaria-Kemper, eur foar-diskouezadenn.

Ar milleroù ar Vretoned a bep stad, deuet betek enni, o deus gwelet e tost da 400 stal, an holl draoù ijinet gant spered ha dorn mab-den, gant sikour pinvidigezioù an douar, evit aesaat ha gwellaat al labourou, ha kaeraat an tiez.

Binvioù labour-douar a oa niverus, re vras evel an dornerezh-nijerez ha saverezh-kolo, pe c'hoaz ar stelejer (tracteur) a nerz 40 loen... ha re vihan evel ar vrec'h-tredan (Bras électrique) da gas en-dro an holl vinvioù en tiegezh, pe c'hoaz an esken da bilat gwez ; ne vo mui tapet a boan gein oc'h ober ar vicher : eun tammig (moteur), stag ouz an eskenn, da lakaat e bole, hag en eun netra a amzer emañ douaret hor gwez dero !

Bez' e oa ive arretbeurioù, evajou, levrioù... ha betek eur stal-visionerezh dalc'het gant Tadou ar Misionou-Afrika eus Lyon, gant eur morian yaouank oc'h ober brud da labour ar Misionou !

N'eus moarvat nemet ar varc'hadourien kezek hag o deyeve bet tro da skrabat o fenn, oc'h en em c'houlenn da betra e servicho « gwella servicher an den » a benn eun nebeud bloavezioù !

Y-F ar F



Breiziz ! Degasit deomp keleier !
Kroaz Breiz a zo ho tra : grit implij anezi.

Skrivit d'an Ao-Y-F ar Falc'hun,
kelenner e kloerdi bras Kemper

Korn ar Merour

Setu Kroaz Breiz gant he zrede lamm.

War welaat eo aet ar bed ganti, pegwir eo dent er-mêz, er wechman, araok hanter ar miz.

A-benn ar miz a zeu, fiziañs hon eus, ec'h en em gavo ganeoc'h araok ar zul kenta, evel ma tere d'eur gelaouenn viziek.

N'eus netra peur-vat, e kement a ra an den, war ar beg douar-man. Eun-tamm rouestl a zo bet diwar goust an diou niverenn ganta : lod eus al lennerien o deus bet re, lod all, re nebeut ; meur a hini a zo bet mac'hagnet o anioù... traou kasais, hag a vezo eñnet, abarz pell.

An irede niverenn-man n'eo bet kaset nemet d'ar re o deus paet o c'houmanant. Sklaeraet e vezo bet evelse hol labour.

Evit gellout servicha ar goumananterien, chomet, eun tammig, da zilerc'hi, hor beus lakaet tenna eur bernig bras a niverennou, a gasimp, gant plijadur, d'ar re o goulennno.

C'houi, mignoned ker, hag a gar ar menoziou kaer, a fell da Groaz Breiz skigna ha difenn, roit an dourn d'eomp, grit ar pezh a zo en ho kalloud evit kreski niver hol lennerien. Ne varc'hatit ket ho poan.

En-dro d'eoc'h, meur a hini o deus ankounac'haet paea o skodenn hag a zo marteze war c'hed eus o c'helaouenn. Dinec'hit anezo, ha dikouezit d'ezo penaos en em gemeret evit dilula o c'hudenn.


Bennoz Doue d'eoc'h ha da gement hini a ro kalon d'eomp da genderc'hel gant hon ero.

Eur vech bennak e lakin amañ pennadoù eus al liziri a gennerz a zo bet degaset d'eomp.





Kousk va Lellig



Kousk, va lel- lig



kousk din-dan la-gad ar ste-red. E - ha-net ka-nan ev-ned, kloz



e bleunvenn ha bo-ked E-man pep trouz o tevel nemet ar sti-vell

I

Kousk, va lellig, kousk
Dindan lagad ar stered.
Ehanet kan an evned,
Kloz eo bleunvenn ha boked !
Eman pep trouz o tevel,
Nemet ar stivell (2).

II

Kousk, bihannig, kousk.
Na pegen sioul ar maeziou !
Prennet doriou an neiziou ;
Skuz zoken da c'hoariou ;
Kousk e peoc'h, kaer da hunvre,
Betek ar beure.

III

Kousk, aelig-me, kousk.
Didrouz, da vamm az tiwall,
He c'harantez o c'hedal,
D'az lakat c'hoaz da dridal,
Pa danvi, gant c'hoarzigou,
Dousder he fokou.

(1) Lodenn ar piano pe an harmonium evit al luskellerez-mañ, a gaver e « New song book, Llyfr canu newydd. » Part. II. dour enni.

(2) Stivell = feunteun-red, a gan an